


Loeizaïg ha Perig



U-zet em eus va bou-tou toul-lez meud va le-rou,
toul-lez meud va le-rou O vont d'oc'h heul pen-herrez
ge ge ge fin la din de-nik O vont d'oc'h heul pen-herrez
a glas-kan da ves-trez.

PERIG

Uzet em eus va boutou
Ha toullet va loerou, (*bis*)
O vont d'hoc'h heul, pennherrez,
Ge ge ge fin la din de nik,
O vont d'hoc'h heul, pennherrez,
A glaskan da vestrez.

Loeizaïg, pa 'z in me d'ho ti,
D'ho klask da zimezi, (*bis*)
Roït d'in eur respont vat,
Ge ge ge fin la din denik,
Roït d'in eur respont vat,
Evel ho mamm d'ho tad.

LOEIZAIG

Respont a rin, den yaouank,
D'eur goulenn 'zo ker koant (*bis*)
Ne livirin gaou ebet,
Ge ge ge fin la din de nik,
Ne livirin gaou ebet,
Dimeurz, vin eureujet.

Dimeurz e vin eureujet.
Diwezat oc'h deuet (*bis*)
Rak eun all en deus hadet
Ge ge ge, fin la din denik,
Rak eun all en deus hadet
Em liorz ar bleun eured.

PERIG

Hadet ganen e oant bet,
C'houi oc'h eus o zennet, (*bis*)
Breman p'o gwelan gwenvet
Ge ge ge, fin la din denik,
Breman p'o gwelan gwenvet
Va c'halon zo rannet.